

# Bue ar Lonker

*Ande*

Gant eur ga - lon kar - get a druez  
me ho ped da zont da gle - vet Eur ga-naou-  
en em eus gret hi - rie E - nep d'an  
e - vach mil - li - get.

## 1<sup>er</sup> KOUPLAD

Gant eur galon karget a druez,  
Me ho ped da zont da glevet  
Eur ganaoun am eus gret hirie  
Enep d'an evach milliget.

## 2<sup>e</sup> KOUPLAD

## 7<sup>e</sup> KOUPLAD

Hanter boaz ac'h e da gorzailhen,  
Krena a ra da izili,  
Hanel awalc'h ouz eur vervaden  
Pa ve war an tan o virvi.

## 8<sup>e</sup> KOUPLAD

Koueza ra ar bleo diwar da benn  
Evel an deliou diouz ar bar,  
War da gorf nan eus nemet kroc'hen  
E man warnout liou an douar.

## 9<sup>e</sup> KOUPLAD

Gwerzet e ganit da oll vadou  
Ha dispignet da oll arc'hant ;  
Te a garfe gwerza da vrugou.  
'Vit galloud eva gwinardant.

## 10<sup>e</sup> KOUPLAD

Da bried paour ha da vugale  
A zo er ger o hivoudi,  
Ha te a zo noz-dez o vale

2<sup>e</sup> KOUPLAD

Tosta aman d'in, paour kez ever,  
Hag e klevi ar wirione ;  
Poent e d'it dilezel ar vicher  
Mar 'teus c'hoant da chom en bue,

3<sup>e</sup> KOUPLAD

Leun ec'h e ar vro a glenvejou,  
An évach a zo kiriek ;  
Kalz a dud yaouank ha priejou  
Ac'h a re abred d'ar veret.

4<sup>e</sup> KOUPLAD

Ankoael a teus ar gelen vad  
Roet d'id keit ma oas yaouank  
Gant da gerent, da vamm ha da dad,  
Enep ar rom ar gwin-ardant.

5<sup>e</sup> KOUPLAD

Vila tra a zo war an douar  
Ac'h e eun den mev o kerset :  
Helpenn a ra diwar e ziouc'har  
Evel eur c'hoz kar dirodet.

6<sup>e</sup> KOUPLAD

Louzoc'h e vez evit ar gwizi  
En touez an teil o turiat ;  
Kignet ac'h e da benn ha da fri  
Leun ec'h out a fank hag a wad.

Da bried paour ha da vugale  
A zo er ger o hivoudi,  
Ha te a zo noz-dez o vale  
Pe kentoc'h en hostaliri.

11<sup>e</sup> KOUPLAD

Da zilhad a zo a fibennou,  
Me a wel losten da roched,  
Da bried ha da vugaligou  
A renko mervel ha hep boued.

12<sup>e</sup> KOUPLAD

Pella diouzin, evach milliget,  
Poent ec'h e da stlap kreiz ar mor ;  
Te a gas eun den prim d'ar vered  
Hag alies koll eenor.

13<sup>e</sup> KOUPLAD

Koll eenor, e nerz e yec'hed  
Ha dougen hano eur lampon,  
Ha mervel gant an naon, ar sec'hed,  
Er galeou pe ar prizon !

14<sup>e</sup>

Araok achui ma c'hanaouen  
Me a fell d'in c'hoaz lavaret :  
Foei d'an ever ! foei d'al lonkerien !  
Ha foei d'an evach milliget !

DANIEL (TREDANER).

(Reproduction rigoureusement interdite)